

BULLIOU an AUTROU-  
CHRIST, composet e Carmou  
Brezonec : var un Ton nevez.

**M**Ar plîch gueneoc'h, e chelaouet  
Ur Verz nevez so composet,  
Da ur Plaç Santel ez e grêt,  
Da Jesus-Christ ez e forniet.

Hac abalamour d'eur Chapel  
Hon eus ebars e Breiz-Izel  
En ur Parres hanvet Scaërl  
E bars en Escopy Quemper.

Christenyen, me hu suppli ;  
Deut' da Sant Salver da Goadri,  
Da c'hounit an Indulgeançou  
So deut deveus a Rom ennow.

O visita bequen ar Chapel  
Ez eus Indulgeançou Plenier,  
Pevar-uguent deis a bardon,  
D'hor pec'hejou remission.

O cofes, o communia,  
Hac o visita ar Plaçmâ,  
Eus diliivranc a bemp eue  
Eus a dan ar Purcator ive.

Gant ar Pab ez int accordet  
Da guement den a so ganet,  
Da guement a zeu et Plaç-mâ  
En intention d'e visita.

Var an douar ne dens hini  
Devotoe'h Plaç evel Coadri :  
Beza eo an ancienn'a

**A Chapelou Christ er vro-mâ.**

E bars er bloavez mil ha cant  
Ha netse pemp hac anter-cant,  
E voa ar guernez et vro-mâ  
Gant an dut oe'h e visita.

Tud fall a voa ebars er c'hontre,  
Adversouryen bras da Zoue,  
Hac a zeuas da Sant Salver,  
A losqneas Bulliou ar Chapel.

Negliget voe ar Chapel neufé,  
Hep nep mantion er c'hontre;  
Daou c'chant hac anter-cant goude  
Ec'h eure Mirac lou arre.

Mæs dre abec ne ouient quet  
Pe soit Sant enhi a bedet,  
Inspiret voe an Autrou Querne  
Da ober oræson da Zoue.

An nos goude an oræson grët,  
Doue en deus e exaucet;  
Dre e Vam e tisquezas dezâ  
Ar vertus eus ar Plaç-mâ.

Hon Jefus-Christ evit e c'hloas,  
A zigaças var an douar  
Mein tous pe dre re e ouier  
E voa Jefus ebars a beder.

Ar Groas voa en darn ane,  
Darn-all an Tach en daou goûte,  
En darn-all form ar Gñrun Spesn  
En toullas betec an esquern,  
Ha tol al lang eus e galon,  
Mercou oll demeus e Bassion.

Dont a ra tud a bep cartier

Bemdez da Iliis Sant Salver  
Da guerc'hat ar Mysteriou-zé ;  
Dre ma zint formet gant Doue,  
Donet a ra dy belezen,  
Ha Tud-Gentil ha Bourc'hisyen,  
Ha Menec'h ha Cabucinet,  
Recoleset ha Paysantet.

A zeu da guerc'hat anezo  
Da gaç gante d'o C'houenchou :  
Bete Rom e casset ane,  
Ur Miracl bras eo quentense.

Auteur ar Verz fo bet e Rom,  
Chaloni e Quempes e chom,  
En deus d'ar Pab o disquezet,  
Ouz o guelet voa estoner,  
A guef ur Miracl bras an dra-ze,  
Eno e viras aneze.

Ha a zeu da supplia  
Ar Christenyed voar ar bed-mâ  
Da zont da zouguen anezo  
Abalamour d'ar Miracloù

A ra Mæn Sant Salver bemde  
En andret nep a sonch enne :  
Evit testeni e clevet  
Daroù ar Miracloù o deus grêt.

A Vourez'h Crozon Rene Joannas  
Da Iliis Coadri a zeuas,  
Hac a gaças ive gantàñ  
Unan demeus ar Mæn Christ-mâ.

En e Barrous pa arruas,  
An Autrou Viquer a glevas,  
Pehini oountam voe coloret,

A redas buan d'e gavet.

Rentet din ar Mæn, emezàn,  
Hoc'h eus digacet a Coadri amàn,  
Va-unan rentet-an din,  
Pe birviquen n'hoc'h absolvim.

Ar Pelerin p'en deus cleyer  
E vise a Absoven privet,  
A rentas pront ar Mæn dezàn,  
Hac èn e chetas diountan.

P'en devoa tolet ar Mæn-ze,  
E laras neufe d'e guile :  
Ma rentet d'ar guer, me Ro ped,  
Ar sclerigen am eus collet.

Allas Doue ! me vel dija  
Ar vertus demeus ar Mæn-mâ :  
Offanset emeus va Jesus,  
Chetu me rentet maleïrus.

Mæs n'en deus eas, motet a in  
D'ar Plaç devout eus a Coadri,  
Hac eno me c'houlenno pardou  
Digant Jesus a vir galon.

A ben daou pe dri de e voe  
En Coadri er Plaç Santel-je,  
Ha n'en devoa quet ar guelet  
Quen a voe ar Mæn deza clasquet.

Clasquet e voe dezàn ar Mæn,  
Laquet ebars en e guerc'hen :  
Voar ben er guear ma voa arry,  
E vele couls ha pep-hini.

Voar ar Chayer cz e merquet,  
Sinet mat ha gouarantet,  
E Crozon d'ar c'houls-je Viquel;

Hoguen ne fell quet e henvel.

Diou Vrœc eus a Guer a Venet ;  
 Mari Riou ha Mari Mettet  
 A voa bet deut da bardona  
 Da Coadri d'ar Plaç Santel-mâ.

Cofesheet ha Communiet ,  
 Roet dezo gant ar Bælec  
 Peb a Væn-Groas da gaç gante ,  
 Hac int d'o disquez et c'hontre.

Hac arraout un den mechant  
 A voa hanvet Rene Jorant ,  
 Hac èn o crigui er Mæn santel ,  
 En taolas e creis ar Rivyer.

P'an-devoa taolet ar Mæn-se ,  
 E voe punisset gant Doue :  
 Maro d'an douar e couezas ,  
 Goude bout taolet ar Mæn-Groas .  
 An diou Vrœc a grogas ennàn  
 Da douguen d'ar guer anezan :  
 Neuse e retornjont d'ar ster  
 Q diou da glasq ar Mæn santel.

Pa attrajont gant ar ster-mâ ,  
 E voa ar pesquet o cana :  
 A ur vouez oll e canent gue ,  
 En ur laret : O Crux ave !  
 O Crux ave , spes unica !  
 Enor da Roue ar bed-mâ.

Autrou-Doue , eme ar pesquet ;  
 Peguer bras graç e dimp-ni cayer  
 Ebars et ster-mâ guenimp-ni  
 Ar Mæn precius a Goadri !

Ny a gano ravigant ,

Ma vo hor mouez quen eloquant,  
Ma vo clevet bete an Eê  
Gant Jesus-Christ map da Zoue.

D'af Guener ar Groas bep blo  
E can ar pesquet er ster-mâ,  
Ouspen tri mil eus aneze  
En amser voar dro ar Mæn-se.

Ha quen agreabl o mouezyou,  
Ma rejouissent ar sperejou  
Deus ar're a dremen ar ster bras,  
Er plaç-se d'ar Guener ar Groas.

Deus a Escopy Sant Briec  
Ur Plac'h Jannet ar Gall hanvet,  
E devoa ar maleur da renconte  
Ur c'hi arraget divergont.

Diaraoc oa bet o pardona  
E Coadri ar Plaç Santel-mâ,  
E tigaças ganthi ar Mæn-Groas,  
Voar dro e gouzouc en laquas.

Ar c'hi nonobstant a bep tra  
A lammas pront gant ar Plac'h-mâ,  
Hac a attrapas ar Mæn-Groas,  
Gant e arrach e lonquas.

Ur Miracl bras da gompreni:  
An diaoul a sorti diouz ar c'hi,  
Hac hep drouc e chomas ar Plac'h,  
Hac ar e'hi a voa rentet yac'h.

Heman so ur Miracl deomp-ni  
A die donet d'hon exhorti  
Da zerc'bel-mat da Væn Coadri  
Hor preserbo ouz drouc ar c'hi.

Deus a C'heurin Mari Raoul

A roas e buguel d'an diaoul ;  
 Pa oa laret e guir presant ,  
 E antreas pevar serpant.

Hac int lammet d'ar Buguel-se ;  
 Cregui ennàñ a bep coste ;  
 Pa ne allent obet drouc dezà ,  
 O deus goulenuet diountàn :  
 Petra so ous da breservi ,  
 Na ellomp quet da remui.

Ar Buguel a bemp bloas oaget ,  
 Biscoas guer n'en devoa laret ;  
 Quen a voa d'ar pevat serpant .  
 Ar c'horisou a glever presant .

Emedi gueneën Mæn Coadri  
 Elec'h n'hoc'heus quet a veli :  
 Ur Myster bras eo a so formet  
 Ha gant Doue e-unan groet .

Neuse e crijont quen horribl ,  
 O songeal e voa impossibl :  
 Quer buhan ez int sortiet ,  
 Ar Vroec a voe ganto norer ,  
 Perclus demeus e islli ,  
 Hep gallout en em remui .

Hemàn so ur Miracl , Christenyen ,  
 Groet dre ar vertuz eus ar Mæn !  
 Preservi ur Buguel ouz pevar serpant ,  
 Ha digaç dezàn ar parlant .

Christenien , e Patres Scaërl ,  
 A dostic memes d'ar Chapel ,  
 E voa bêt ur Buguel eonezet  
 Ebars en ur punç dòn meurbet .

E spaç a chueach heur dianquet ,

Na ouier pelec'h oa et ;  
 Pa yas e Vam da denna dour ;  
 E eavas er punç he c'hrouadur.  
 Hac bi commanç da grial ;  
 Ar Buguel a respont rectal :  
 Tevet, va Mammic, emezàn.  
 Me n'em eus drouc ebet amàn.  
 Ar Vam pa glevas anezàn,  
 A c'houlennas prest digantän :  
 Petra on deus ho preserver  
 N'en d'oc'h en dour et d'ar gouelet ?  
 Ar Mæn oc'h eus laquet em c'herc'hen  
 Griet ebars un tam lien.  
 En dour betec ennàn hon et.  
 Hoguen davantaich n'en dan quet.  
 Ouzpen eus unan crog em dorn,  
 Touller e zreid hac e daou zorn,  
 Hac un taol lanç diodan e vron,  
 Hac ur Croas ebars en e zorn.  
 A so aman ouz va sicour,  
 Hac èn ne douich quet ouz an dour,  
 Hoguen, ma Mam, ho supliän,  
 Ma zennet emeus ar punç-màn.  
 Neuse voe spiamer ar butzud,  
 Ma teuas nombr bras eus a dud ;  
 Tennet voe demeus ar punç-se  
 Yac'h ha dispos, hac en buhe :  
 Voar ar c'hayer ez e merquet,  
 Gant unan ha tregont finet.  
 Es ur Mission en Naounet,  
 Chelaouit oll hac enteniet,  
 Pa vea ar Bazlec o sermon.

E erruas gurun gizaua.

Dre an ner-dal e antreas,  
Ur maleur bras a c'hoarvezas.  
Rac pevar c'hant den a semples,  
Trizec a vougas var ar plaq.

Ar Ba/loc beptet a brezegue,  
Hac a voe disklolet i've  
Deus ar Gador emesq an dud,  
Ha ma voe terrubl ar burzud.

Ruillet en cil pen d'eguile  
Gant ar gerun dre an Iis-fe,  
Pa ne alie dont d'e lazan,  
En toalas ur c'hart-leo dioutam.

Hac én dont da gonsideri  
Petra voa ouz e preservi:  
Ebars eu e c'hodel pa sellas,  
Men Coadri ebars a gavas,  
En devoa roet e Dat dezâ,  
Bet e Coadri o pardona.

Ur Vrœc hanvet Mari Mene  
En poan deus a vugale,  
E spaç deus a bemp de poaniet,  
Ha gant an oll abandonet,  
A voe inspirer gant Doue  
Evit geemeret ar Man-fe.

Pa geemeras Mæn Sant Salver,  
Ha laret varnezan pemp Pater,  
Daou vuguel e deveus ganet  
Cafî hep sancout poan ebet.

Chelaouet c'hoas, me ho suppli,  
Ur Miracl gret gant Mæn Coadri,  
Ha dre græc Jesus hor Salver,

110

En enor dezàn en douget.

A Gonquerne ur Merdeat,  
Voar ar mor en ur gòmbat,  
Lequet an tan en e listri,  
Ha couezet er mor da veuzi.

Tri-ugnent den a voa el leste  
Ebars er mor a venuzas preft,  
Nemet tri-all hac au den-màn  
A voa Mæn Sant Salver gantân.

Rac-se voar ar mor a neuyas,  
Dre ar vertu cur ar Mæn-Groas,  
Ar re-all crog ennàn o zri,  
Pebez moyen d'o c'hundai!

È Conquerne pa erruas,  
An dud diountân a c'houleñnas:  
Pelec'h ema ho confortet  
So gueneoc'h ac'han partiet?

Ebars er mor omp attaquet,  
Siouaz, gant hon ennemiet;  
Lazet ha beuzet e ar re-all,  
N'eus chomet nemerdomp hon pevar.

Penaus eta hoc'heus-n gret,  
N'en d'oc'h na beuzet na lazet?  
C'hui a voa assambles ganie?  
Penaus e arruet quemense?

Quent evit ma voamp ambarquét,  
Em boa alies suppliet  
Quemeret a Goadri ar Mæn-Groas  
Da vont guénéomp voar ar mor bras.

Nemet ober goap ac'hanon ne ret,  
Doue en deus-y punisset;  
Me voa beuzet quercouls hac y,

Ma ma vige guenê Mæn Coadri.

N'en deus den sur e nep canice ;  
Mar de ur C'christen fidel ,  
N'en deus gantù e pep amser  
Unan eus a Vein-Sant Salver.

Ar Mæn a Sant Salver so mat  
Ouz an drouc ebars en daoulagat ;  
Ouz arderien n'en deus quet guell tra  
Evit eva dour diوارnezâ.

Ha neuse d'ar groaguez a ve  
E poan da guenel bugale ,  
Ouz an dour , an tan , ar gurunou ;  
Preservi a rei nep en dougo.

Ouz ar chas arraget mat e ,  
Ha da lacat d'ar vugale ,  
Evit miret na vent scoet  
Gant bar na drouc aves ebet.

Gant ar Pap Celestin digacet  
Da nep en dougo gant respect  
Daou-eguent bloaz pardon ,  
D'hor pce'hejou remission ,  
O ront da zerc'hel ar Mæn-se  
En o compagnuez nos ha de.

Mæs ret eo lavaret voarnezâ  
Pemp Pater ha pemp Ave Maria ,  
Hep mancoute gueich , da bep Guener ,  
Da devez a Guener ar Groas  
So enni Indulgeançou bras.

Da Vouet ar Sacramant da Yaou  
Ez eus ar memes Pardonou ,  
Evelse d'ar Guener ar Groas ,  
Pa neu tud doi veat o zec'h noas.

En o e cavo ar pec'her  
 Digant Jesus-Christ hon Salver  
 Un arm bac a so cre meurbet  
 D'hon diouall ouz an droue-speroz.

Christenyen, voar dro ar Chapel  
 E supesomp douar sanctel,  
 Rac nemet e douar Mene Calver  
 N'en deus Mysteriou hon Salver,  
 Evit a guement a ve formet  
 En douar gant Salver ar bed.

Mæs pa na ellomp moner dy,  
 Deomp oll d'ar Chapel da Goadri,  
 Ny gavo ar memes Mysteriou  
 Formet gant hor Salver enho.

Ar Groas memes ma zeo bet  
 Jesus d'ar maro laqueet,  
 Na de quet, creder petra larau,  
 Preciussoc'h evit bouman.

Racfe c'hoas dimp-ny boursevyan,  
 Hac hor c'brimou-ni pec'heryen,  
 En deus bet formet ar Groas-le  
 Da laquat d'ar maro Doue;  
 Hac en e-unan en deus groet  
 Ar Mysteriou-mañ binniguet.

Racfe compren eta, pec'her,  
 Pe ar Groas groet gant hor Salver,  
 Pe an hini a reomp hon-unan  
 A die beza ar preciussa.

Jarein clurus ha binniguet,  
 Gant Goad Jesus arrouset,  
 Conservet din ur bouquet ros  
 D'am seuriga er Barados. **JIN.**